

(379)

Guery neverz,
 Var sujet eur zoudard eus a arme an Afriq, assassinat
 a daoliou countel gant e dud.

Var ton : Guery ar plac'h libertin.

P'eur eta, va Doue, ec'h ellin recita
 Euy dra a gonsolant evit tud ar vro-mâ !
 Rencout a ra'n adare disclêria dirac an oll
 Un torfet ifermus carquet eus a horrol.

Mes pa deu va speret gant eves da gontempl,
 E souc'h din va recit a zerricho d'exempl ;
 Rac o tout da zisclêria torfejou gen horrerus,
 E santot pequer douç eo carout ar vertus.

Fanch - Job Richard a voe e Bis - Feunteun ganet ;
 Abaoue bianic ne voa gen occupet
 Nemet d'en em gundui gant enor ha lealdet,
 Vit na vije bigen en nep cas tamallet.

(380)

Yaouanz en em angach equis eur volonter,
 Hac e parti qerqent evit arme Alger.
 Epad amzer e zerrich, atao voe soudard vaillant,
 Ha caret gant an oll ebars er regimant.

P'oe êchu e gonje, e tistroas en Franç,
 Carquet demeus a joa, ha gant an esperanz
 D'ober un affer benac, evit un devez da zont
 Eurus, dre honestis : var ze e rê e gont.

Ramplaci a eure mab un den pinvidic,
 A rê boneur e dud, hac a voa mab unic.
 Contet e voe da Richard eur som bras eus a arc'hant
 Neuz e gent partial evit e regimant.

Mes, furroc'h equet calz, ebars ty eur banquer



E tēpos e arc'hant gent distrei da Alger,
Rac sonjal rē gent rēson eo suffisant d'eur zoudard
E bae erit beva hac erit monti gard.

Antreac a eure er chasserien d'Afric;
Eur zoudard bras a rē hac un den manifiq.
Gant courach e combatas e Constantin, en Oran,
Hac er c'harnach terrubl demeus a Marzagran.

Selaouit oll errvad, me ho ped, Bretonet,
Un dra ha me zo sur ho rento estonet:
Lant tri varnuquent haros o deus eno fulluhet
Gant eur gourach ardant daouzec mil Arabet.

(381)

Decoret voe Richard eus ar Groas a Enor;
E gonje en devoe, hac e treuzas ar mor.
Gemer eure e arc'hant hac oustren, an interest,
Hac e ya en e hent joaüs bras, prim ha prest.

Antren 'ra 'n ty e c'hoar, pini voa demezet,
Hac e proq dei gant joa hac ive d'e fried:
« Monet a ran, emezàn, da dy va zad da loja;
» Mes n'em em hannin get qer a vezo varc'hoa.

» Me laqay prepari un dijuni errvad,
» E pini vimp hor pemp, c'houi, me, hor mam, hor tad;
» En eur eva eur barne, me rai n'em anavezout,
» Hac ar veren en dorn ni en em boqo tout.»

Qergent e ty e dad e zē en em rentet,
Hac e c'houlen coannia ha ma vije lojet.
Allas! e dad nac e vam n'o devoe get nep douetanç
E lojent o buguel, objet o esperanç!

Ar vam e doa goelet en devoa calz 'arc'hant,
Ha pa zant voa cousqet, e red incontinant
Da furchal sac'h e mab paour, ma vel an dour o vrilla,
Hac erit er c'havout e sonch dont d'en larza.

(382)

An drouc-speret e c'hass d'e fried da bropos
Etre diou variqen er c'hao d'ober eur fös.

An tad, allas! a gonsant; ar vam, gant arrach cruel
A vassacr e buquel eus a doliou countel.

Vardro eiz heur anter ec'h antreas en ty
Ar vere'h hac ar mab-caer evit an dijuni.
Allas! diouc'h-tu e veljont ar c'hrim voa bet coumettet,
Hac e scrijont spontus vel tud disesperet.

Ar justiq a deuas da gonstati ar c'hrim;
Cavet e voe souden corf ar paour qez victim;
Dastumet e voe ractal an daou autor an torfet,
Ha d'ar maro e zint bet o daou condaonet.

Ar vam griminal-ze er prison a lennas
Ebars lemiou santel, re divezat, siroas!
Hac e cavae calz matier da zont da reflexissa
Var e c'hrim horrenus er moment diveza.

(383)

Deus a fouz e c'hachot e oie gant estlam:

- « Me zo eur vuntrevez, un horror da bep mam....
 - » Lazet e meus va mab qer evit cavet e arc'hant!
 - » Me dle paea va c'hrim dre ur c'hris chatimant.
- » O arc'hant milliquet! penn-caus demeus va c'hrim,
 - » Te ras e peb amzer, allas! meur a victim.
 - » Perac na deuas ractal an douar vit va lounqat
 - » Er moment ma teuis va mab da gountellat!...
- » Adieu, va merc'hic paour, ha va mab-caer ive;
 - » Adieu, va oll querent; me renq mervel hiriz!
 - » Oh! me ho ped da nonpas dont da scuill an infamdet
 - » Var va memor bigen, na ne vin excret.
- » Pardon, ô va Doue! pardon, ô va mab qer!
 - » Pardon, va c'herent oll! pardon, tud va c'harter!
 - » Just eo d'in-me souffr hirio ur suppliq zo qer garo:
 - » Pedit oll evidon.... mont a ran d'ar maro.
- » C'houi oll, tud ar c'hanton, spicial yaouanqis,
 - » A ya da veza test demeus va goal suppliq,
 - » Sellit va fin qer infam, carit atao ar vertuz.

54

» Hac e vezot bepret qu'ir rugale Jesus. (384)

- » Rei a rân va c'horf paour en chatimant hirie,
 » Va ene a roân, o crêna, da Zoue:
 » Ra dewvezo e receo ebars en e garante,
 » Ha graç m'er possedo hed an eternité.»

A. Lédan.

(Vol. VI, p. 379-384.)
 24 sti. numérotées.